

I

Pediculus humanus capitis

Kaer e oa an amzer er mintin-se. Tud yaouank a zigore abavantoù o c'hambroù. Mouezh ar bara fresk ha pobet mat en em strewe er straedoù enk ha sklêrijennet dousik get terenoù un heol tanav. Ar boser a laboure e lost e stal, é taouhanteriñ moc'h ha palevardoù leueioù. Ur c'harr-tan bennak a zirenke sioulded ar gêr vras chomet didud hogozik. Sonet o doa kleier an iliz-veur hag an douristed a selle doc'h kartenn ar meuzioù o dehe bet da c'hourc'hemenn un teir pe beder eur àr-lerc'h. Gouelini ar porzh a yae get an avelig mor halenet dreist d'an toennoù, ambrouget get c'hwitell ar glaouered. An aer a groge da vout tomm. Dihun a rae kêr Wened. Ur Sadorn hañv èl razh Sadornioù an hañv. E-raok dek eur e vehe bet leun a otoioù er parkvaou. Leun a dud é tebriñ sukrantin hag é komz kreñv er stalioù da ouiet pezh kartenn *SHOM* preniñ e-raok monet àr vor. Bagoù pourmen a arrue an eil àr-lerc'h eben, digor a oa pont Kerinou. Àr ar blasenn e lenne Parizianed o c'hazetennoù "*Paris Turf*", "*Le Monde*" ha kazetennoù da ouiet petra a dremene e koskor uhelidi hor bed. Lec'h da gredout bout en o bed. Lec'h da chom

stag doc’h o bed o doa kuitaet evit ur miz. Krennardezed a ziskoueze o begeloù d’an hañverion, kuzhet a-dreñv o lunedoù-heol. Disourssi hag eürus. Bout gwelet, ar pezh a gonte ar muiañ. Ar stalioù, an douristed, ar re yaouank, razh anezhe a glaske bout, evit selloù ar re arall. Ha peadra a oa da welet !

Just èl bep mintin en em gavas Kristina Kermorvant en he stal “*Kristina ha Loeiza, an avel en ho plev !*” Pell e oant bet é klask un anv jaojapl d’o stal hag a-benn ar fin e oa bet roet an anv-se dre ziouer a soñjoù. Skrivet e melen àr dal an ti e chome ar skritell, mezhek ha truezek. Ne oa ket gwall abred evit digor, met dre ma labourant dre emgavioù e kavent amzer d’ober ar pezh a blije dezhe hep gortoz àr-lerc’h ar pratikoù. Kristina eo he doa da zigor. He c’hensortez Loeiza he doa da zont un dek munut àr-lerc’h. Plijout a rae dezhi dont da gontiñ pemp-ha-pevar get ar pratikoù e-raok krogiañ get o labour. Trawalc’h, kuit dezhe a goll kelajoù dedennus hag evet un tasad kafe a veze profet bep mintin get paotr an davarn, ha eñ bet c’hoant a-walc’h da vont muioc’h e darempred get ar merc’hed-se.

Èl ma oa bet skrivet àr he c’haier e tegouezhas an Itron Smith. Ur Saozez kozh, prenet geti un ti e-kreiz kêr, ur pemp blez bennak ’oa. Hag a-c’houde ar c’hourz-se e tae bep sizhun da gempenn he blev. Setu ma oa teir sizhun ne oa ket-hi daet. Pellgomzet he doa an neizhour da c’houlen emgav gete. Donet a raas en ti ha saludiñ a raas Kristina buan. Hi, souezhet er penn kentañ, a sellas spisoc’h doc’hti e-raok goulenn :

— Penaos e ya an traoù genoc’h Itron, pell zo n’hon doa ket ho kwelet ! Get ma n’eus ket bet degouezhet tra erbet fall genoc’h.

Honnezh, goude bout graet ur c'hempenn d'he hiviz seiz gwenn e lâras en ur brezhoneg saoznekaet hag é-raok pouezñ trumm he diàdreñv àr an azezenn :

— A, Kristina, start eo mont da gozh, c'hwi a ouia ! Bet e oa ma breur-kaer ha ma c'hoar er gêr hag o bugale gete ! Bandennad gasted ! Trouz o deus graet er ranndi, fumet on doc'h an amezeion bremañ ! A-benn ar fin int aet da a..., aet int kuit dec'h. Mil mizer am eus anduret, ur sort ! Bremañ em bo un euriad hanter evidin-me ma-unan, ha vad a ray, m'en asur !

— A, ar familh... Gwelloc'h e vez pa vënt pell, a-wezhoù. E pesort stad emañ ho plev ! O ma Doue, ret eo adober ho nac'hennoù, penn-dre-benn. Opala, labour zo ! Ma... ma lunedoù... e men emañ ma lunedoù ? Chomet int àr ma lerc'h moarvat.... A, Loeiza, arru oc'h !

— Demat deoc'h Itron Smith, penaos eh a an traoù ? Pell zo n'hon doa ket ho kwelet. Monet a ra an traoù geneoc'h ?

— Goulennit get Kristina... ur spont eo bet ! Achu eo bremañ, evidin hag evite ivez... rak... n'eo ket bet aes evite ivez, gouiet a rit...

— O ya, ar familh, ar pellañ ar gwellañ !

— Loeiza, ne vehe bet gwelet ma lunedoù genoc'h ?

— Tamm a-grenn ! Eh an da glask kafe... Tri zasad !

— Af, krogomp neuze. Soavon blev... Ma brugenn... Ma zroc'herez... Daomp !

— Gellet a ran lenn ar gazetenn ?

— Gorto'it m'he zapay...

Chom a raas an Itron Smith un herrad é lenn an titl bras àr c'holo ar gazetenn ; *“Pemp korf kavet a-barzh ar porzh-mor, emañ an enklask é krog !”* Da heul e tisplege ar

c'hazetennour e oa bet kavet ar c'horfoù dre ma oa bet dichal bras an noz kent ha spontet e oa bet ur c'harrad-boutin Alamanted.

— Ma n'eo ket maleürus, ur sort ! Hag e Gwened oc'hpenn !

Er memes kourz e sonas pellgomzer ar stal.

— Kristina ha Loeiza...An avel en ho plev, petra a c'hellan gober da sikour genoc'h ?

Ur vouezh c'harv a gomzas dezhi. Pellaat a raas he skouarn a-zoc'h ar pellgomzer e-raok tostaat.

Chom a raas Kristina, difich un herrad, ha n'he doa ket digoret he beg ma klevas son ar pellgomzer skourret en-dro. Er memes kourz e taas Loeiza er stal.

— Na kaer eo hiriv, chomet on da gomz get Luigi... Setu ho tasadoù... Mont a ra Kristina ?

Kroget he doa da grennañ blev an Itron Smith en-dro. Kreniñ a rae un tamm ha neoazh ne faote ket dezhi diskouez netra ebet ag an enkrez a zante he c'halon. Glas e oa daet da vout. Chom a raas a-sav e-raok azeziñ ha lâret :

— Ne ouian ket petra a zegouezh... Skuizh on sur a-walc'h...

— Skuizh Kristina ? a oc'hpennas eben, da seizh eur noz e oac'h é kousket an neizhour... Petra a zo enta ?

Ne lâre grik an Itron Smith. Evet a rae he bannac'h kafe, da c'hortoz bout kempennet dezhi. Sevel a raas Kristina ha derc'hel a raas get he labour.

— Pegeit e chom e-raok ar vakañsoù ? a oc'hpennas-hi.

Sellet a raas an Itron Smith doc'hti e-raok lâret :

— Me n'em eus ket afer gouiet pegourz e vo ar vakañsoù, e vakañsoù eh on a-c'houde mand on arru e

Breizh ! C'hoarzh et a raas ha diardoù e kempennas he hiviz. Na dezhi bout àr he zri-ugent vlez ne ziskoueze ket bout kollet re a he hoalusted. Ritennoù a esae dont àr-wel àr he fas livet. Ur stourm pemdeziek, èl ur c'hadour kollet pep spi getañ a zalc'h d'an emgann. Gwelet e veze splann e klaske enebañ doc'h an amzer. Doc'h ar blezioù a zebre anezhi a-laer-kaer.

Chom a raas un euriad hanter é kempenn he blev hag é kontañ kaer er sal. Goude e saludas hag e tistagas :

— Betek ar c'hentañ merc'hed, devezh mat ha... diwallit àr ho hent ! Kenavo.

Sellet a raas Loeiza doc'h Kristina ha goude bout kribet he blev en-dro e sellas doc'h he c'hensortez arre e-raok hec'h atersañ :

— Kristina ! Petra ' zegouezh genoc'h ? Kristina ?

Chom a rae mut Kristina, n'he doa ket fichet a-c'houde ma oa aet an Itron Smith àr-stegn. Klask a rae he selloù he heuli da ouiet... Da ouiet petra ? Troiñ a raas da respont da Loeiza :

— Loeiza... ur bellgomzadenn a zo bet tuchant...

— Ya, ha neuze, piv 'oa ?.. A-benn pegourz an emgav ?

— Loeiza...Ur paotr e oa hag... ha lâret en deus komzoù diharak din. Komzoù lous ne gredan ket adlâret, biskoazh !

— Komzoù lous... Ken kourz da vintin... Mes... Piv 'oa ?

— Ne ouian ket tamm, lâret en deus din en doa c'hoant da welet... afi kompren a-walc'h a rit !

— Ur maniakosistraket, unan oc'hpenn c'hoazh ! Dec'h on bet hegaset get ur paotr yaouank a c'houlenne kaout ur blank digenin. N'em eus ket roet netra dezhañ,

n'o deus ket 'met labourat ! Huchet en deus àr ma lerc'h.
Aet on kuit buan, me 'lâr deoc'h ! Diaesoc'h-diaes eo
ar vuhez ha n'ay ket an traoù àr aesaat, gwelet ho peus
ar gwallzarvoud... Ne spiray ket, chom a rin genoc'h
bepred, ne vern ar pezh a zegouezhay.

Tostaat a raas doc'hti ha he briata a raas kreñv.

— Hag an Itron Smith, petra a dremen en he fenn ?

— Just a-walc'h ! Petra 'oa geti ? Ha gwelet ho peus
stad he blev ! Doñjer ! Ar wezh kentañ dezhi mont kuit
ha goulenn paeñ diwezhatoc'h, a pa rahemp-ni kement-
arall...

— Penaos 'ta he blev ?

— Dait da welet. Blaziñ a raent, ha pa lârer tud
pitaot... Kredet em eus kempenn blev ur glaskerez vara !
Sellit !

Tostaet e oa doc'h an dar. Hag é sellet spis e oa. Tapout
a raas krog er grib ha...

— Laou ! Man Doue... Laou a lâran deoc'h ! Sellit
leun a laou a zo àr ar grib... Ha kribet em eus ma blev-
me get ar grib-mañ... Ec'h ! Doñjer... Laou !

— Laou... An Itron Smith... Laou !

— Laou an Itron Smith ?

II

Mintiniad er stal

Da heul an Itron Smith e arrue klianted arall, hrevez urzh ar c'haier dalc'het get an div vaouez. Loeiza ha Kristina a glaske gober èl bemdez, diseblant. Komz get bourc'hizion kreiz-kêr ag ar feson ma labouront en o stalioù, e-ser troc'hiñ blev foll en-dro d'o divskouarn... farsal get ar vichererion, ken aes ha tra. Gober ur c'hempenn d'ur penn disto, evit ma en em santo muioc'h en e vleud evit goulenn merc'hed yaouank da zañsal, ur wezh c'hoazh... Met istoerioù “An aotrou hag an itron X o deus bet ur verc'hig...” kelenner brezhoneg ar skolaj tost, hag a oa daet ar Sadorn-mañ èl bep eil miz, ne oant ket evit o lakaat da c'hoarzhed ar wezh-mañ. Loeiza, c'hoazh, un tammig, met Kristina ne lâran ket ; ne ouie ket get petra e oa bet lakaet an diaesañ : laou dic'hortoz an Itron Smith, a wele c'hoazh é fichal o fatoù etre dent ar grib, èl evit ul laridenn doñjerus... pe neuze ar bellgomzadenn-se, ha mouezh an den-se en tu arall, hag en doa lâret gerioù gros ha kriz dezhi... gerioù na oa ket evit kompren petra a oa kaoz e oa dezhi-hi e oant bet lâret. Met a-dra-sur e oant bet lâret dezhi... Get jestroù

diasur e klaskas gober he labour kempenn ar stal, renkiñ ar benveger, fonnapl. Afer he doa ag em denniñ un tammig en ur gognell, pell a-zoc’h selloù ar pratikoù. Lâret he doa an dra-se da Loeiza, e pleg he skouarn. Ha Loeiza he doa lâret dezhi e c’helle monet d’o ranndi a-dreist ar sal, da ziskuizh ; hi a rahe àr-dro ar stal en hec’h unan e-pad ur c’hard-eur bennak ; ha muioc’h mem ma vehe rekis.

E-raok krapout e sellas Kristina doc’h ar blatanenn àr ar blasenn, paravis d’ar stal, hag a c’hoarie he del get heol ar mintin. Hag ar big a veske he sae wenn ha du doc’h ar brizh-heol, e diabarzh fourchellek ar wezenn. An arvest-se, èl ur miloer, a lakaas he foan ag ar momand da vout lemmoc’h, ha kreniñ a raas muioc’h c’hoazh. Ar blatanenn a veze dalbezh dirak o stal èl ur c’hi feal, hag hiniv e seblante bout èl ar chas-se hag a sell doc’hoc’h èl p’o devehe komprenet tout ar pezh a zo en ho kreiz... Re a oa, mall e oa kuitaat ar sal. Tostaat a raas doc’h an nor skrivet “Prevez” àrnezhi ; lakaat a raas dorn an nor da droiñ, get un drouz vil ha ne rae ket da gustum ; hag en trepas em gavas Kristina. Ar skalier a oa er penn arall anezhañ...

Kristina ne oa ket evit monet tre betek ar skalier, e-kreiz an trepas e sante ur gwask en-dro d’he c’horf, c’hwez àr he c’hein ; karg e oa he spered a skeudennoù diskiant, èl bep taol a pa sante an aon en he fenn : kaoterioù kozh ha gris é stokiñ an eil re doc’h ar re arall, gozed éc’h ober toulloù spontus en ur jardrin brav èl un daolenn livet get Monet, gwez é koll o barroù hag é tonet da vout bizhier hir ha sot... Ya, pelloc’h evit ar pezh he doa gwelet ha klevet get an Itron Smith, e oa get ar bellgomzadenn-se e oa bet trejeboulet. Ur vouezh paotr, rust, vil... en doa distaget komzoù a-ziàr he c’horf-hi,

èl pa ne vehe ket dezhi ar c’horf-se. Graet en doa anv a dachadoù a he c’horf hag a oa dezhi muioc’h evit ar re arall, ha hi a sante he divhar é tostaat an eil doc’h eben, hep gellout gober netra ken. Soñjal a rae, evit klask gounit an tu-kreñv en-dro, “Ya, ur paotr yaouank, ur studier, é pellgomz din, dirak e gamaraded, peogwir emañ aet e koustele gete... ma choazet en deus a-dra-sur abalamour mand on un tammig bourc’hizez a-fet dilhad, ha get ma feson da gomz... plijusoc’h e vez d’ar baotred-se lâret komzoù sort-se d’ur vaouez gwisket cheuc’h...” met ne oa ket peursur ag ar pezh a soñje aze. Marse e anave ar vouezh-se muioc’h evit ma faote dezhi krediñ. Ne oa ket da dortal atav, ar bellgomzadenn he doa dihunet un dra bennak enni, betek santadurioù euzhus en he c’horf... Un dapenn a redas a-hed he bougenn, met pas muioc’h, ret e oa bout kreñv. Hag e kempennas un tammig he blev du ha berr e-raok mont er-maez dre an nor àr-dreñv. Moarvat e oa tremenet paotr-ar-lizherioù d’an eur-se...

E-pad an amzer-se e oa aet Serj Abaloc’h a-barzh ar stal, get e vlev un tammig parchet, diblaen. Mall e oa gober ur c’hempenn dezhe. Archer e oa, e ti ar jañdarmed e Gwened. Ha lies e veze gwelet é tremen dirak stal “*Kristina ha Loeiza, an avel en ho plev*”, karget da ziwall an hent-mañ-hag-an-hent, da barraat doc’h an dud a dostaat doc’h ur c’horf marv, pe doc’h un oto distrujet, da c’hortoz ma vehe daet tud ar polis a justis da studiñ an traoù. Ne oa ket c’hoazh daou-ugent vlez anezhañ. Ur paotr yaouank-kozh, get ur barvig moan, lunedoù fin doc’h ar c’hiz, ken fin ma oa kentoc’h ur linenn etre e zaoulagad, mechal ma wele gwelloc’h gete pe hepte... Ur c’horf treutik, ma veze santet ur sort nerzh ennañ

ur sort, hag ur vouezh *crooner* dezhañ. Loeiza, an hani yaouankañ ag an div droc'hourez-blev, a blije dezhañ get he daoulagad du ha digor-bras, get he blev kistin dieub ha skañv, èl ma ne vez ket ken lies-se get an troc'hourezed-blev. Loeiza a ouie an dra-se, gwelet he doa penaos e oa-eñ kontant pa rae-hi àr-dro e vlev, penaos e lugerne e zaoulagad gris pa lamme e lunedoù e-raok azeziñ àr ar gadoer, evit sellet aesoc'h doc'h he fas. Met Loeiza ne oa ket é klask tostaat doc'h hennezh, tamm ebet. Dre he micher e wele paotred ha ne zisplijent ket dezhi, met ne glasko ket mont e darempred gete er-maez ag ar stal. Ha ne oa ket sot get dremm Serj Abaloc'h, oc'hpenn-se, nann ; hag evit achuiñ e kave diharak e lunedoù, neuze...

Neoazh, an deiz-se en em sante prest Loeiza da c'hoari un tammig get Serj ; damankouaet he doa stad truezek he c'hensortez, marse diàr efed an heol plijus-se... Gwir eo ne oa ket-hi he doa resevet ar bellgomzadenn, na santet laou an Itron Smith edan he bizied. Met c'hoant he doa Loeiza da c'houiet un tammig muioc'h a-ziàr an darvoud spontus-se hag a oa chomet en he spered, a-c'houde m'he doa gwelet ar pennad er gazetenn. Hag evit an dra-se e faote dezhi moumouniñ Serj, tammigoù ; kement ha klevet getañ ar pezh en doa gwelet e dour du ar porzh da beder eur da vintin an deiz kent.

Pa lakaas an hanter-roched en-dro d'e zivrec'h ha d'e vruched, evit gwarantiñ e zilh, e pouezas muioc'h evit kustum he daouarn àr gorf ar gwaz. Aze e raas just ar pezh a oa rekis, pas re, met get skiant. Hag e-mod-se e krogas da vuzuliñ hirder e vlev en-dro d'e zivskouarn, islinenniñ tro e skouarn kleiz get he biz tener, dañsal en-dro d'e dal get ar sizailh, en ur gomz ag an amzer vray, ag an niver a douristed hag a oa dister a-walc'h evit ar

c’hentañ dibenn-sizhun a C’hourhelen... Pa welas e lagad damserret, e zorn àr e vorzhed ha ne ouie ket mui da ven monet, e ziweuz lec’h ma tae ur sort bokig skañv, e soñjas e oa arru an termen da venegin an afer nevez.

— Spontus eo ur sort ar pezh a zo degouezhet er porzh, ne gav ket genoc’h ?

— Oh, geo, n’heller ket lâret ar c’hontrol...

— Korfoù e-mod-se en dour... Dre chañs n’eo ket-me am boa o c’havet ! Vatiñ em behe bet graet sur. C’hwi a zo c’hwi kustumetoc’h...

— N’heller ket bout gourdon doc’h sort traoù, neoazh em eus bet gwelet darvoudoù dre ma micher.

— Aze e oa e-tal ar bagoù diwezhañ e oant bet kavet, an dra-se eo ?

— Pas fasipl. Kentoc’h goude ar skluz, lec’h ma franka un tammig. Un den a oa é parti ag ar porzh da vonet da Lokmariakêr àr e vag dre lien. Gwelet en deus un dra en dour, ha krediñ a rae e oa ur vorglaourenn ; intereset mand eo get ar loened-mor en deus klasket gouiet petra e oa ; ne oa ket ar pezh a grede, met hiviz ur vaouez, hag é tenniñ àr an hiviz en deus sachet àr ur c’horf ivez. Goude bout galvet ar polis o deus labouret ar splujerion ha kavet ar pevar c’horf arall hanter c’holoet get ar vein àr ribl ar c’hanol.

— Hag e oac’h-c’hwi aze ?

— Arru a oan get ar boliserion, ma c’harg-me a oa diwall doc’h an otoioù evit ma vehe aes d’an enklaskerion monet ha donet.

— Ha penaos e oa ar c’horfoù-se ? A-c’houde... pell, e oant en dour ? eme-hi get ur vouezh dous atav, evit chom hep bout klevet get ar re arall.

— N’hellan ket lâret, n’oa ket aotreet.